




**KELENN D'AN OADOURIEN**

**BILAÑS DISTRO-SKOL 2007**

**ARSELLVA AR BREZHONEG  
MIZ DU 2007**

# AR C'HINNIG KENTELIOU NOZ HA STAJOU

Ar c'hinnig kentelioù noz d'an distro-skol 2007 hag ar c'hinnig stajoù e 2006/2007



## Kentelioù noz

Renablet hon eus **151 aozadur** (+2 e-keñver 2006) a ginnig kentelioù noz d'an oadourien d'an distro-skol 2007 e **172 kumun** (+1 e-keñver 2006), da lavaret eo ur gumun diwar dek e Breizh. Takadoù bras a chom goullo avat : reter Aodoù-an-Arvor, norzh al Liger-Atlantel hag ar pep brasañ eus Il-ha-Gwilen e-maez bro Roazhon.

- Aodoù-an-Arvor : 30 aozadur (+ 6 e-keñver 2006) e 30 kumun (stabil e-keñver 2006)
- Penn-ar-Bed : 67 aozadur (-2 e-keñver 2006) e 65 kumun (-2 e-keñver 2006)
- Il-ha-Gwilen : 12 aozadur (-1 e-keñver 2006) e 17 kumun (+2 e-keñver 2006)
- Liger-Atlantel : 13 aozadur (-1 e-keñver 2005/2006) e 17 kumun (stabil e-keñver 2006)
- Mor-Bihan : 29 aozadur (-1 e-keñver 2006) e 43 c'humun (+1 e-keñver 2006)

E-maez Breizh hon eus kavet **30 kevredigezh** a ginnig kentelioù brezhoneg evit poent : 3 e Pariz, 11 er peurrest eus Bro Bariz ha 16 er peurrest eus Frañs.

## Stummerezh dibaouez

**13 aozadur** a ginnig ur stummadur dibaouez d'an dud deuet (enskrivet e roll ar GREF Bretagne), da lavaret eo unan ouzhpenn evit warlene : Studi ha Dudi.

## Stajoù


**18 aozadur** a ginnig stajoù e Breizh (evel warlene).

E **29 lec'hiad** e Breizh ez eus bet aozet stajoù gant **14 framm** e 2006/2007. Kresket e oa an niver a lec'hiadoù eus 21 da 28 lec'hiad e 2005/2006. Tost heñvel eo niver al lec'hiadoù e 2006/2007 ouzh hini ar bloaz a-raok. Er c'hontrol e oa neuze nebeutoc'h a frammoù eget bloaz a-raok (17 framm e 2005/2006). Diouzh ar goulenn e **framm** ar bed kevredigezhel e ginnig stajoù.

- 4 lec'hiad en Aodoù-an-Arvor, goulo e chom ul lodenn vras eus reter an departamant,
- 12 lec'hiad e Penn-ar-Bed, nebeut a stajoù zo bet aozet e kreiz an departamant hag e Bro Leon,
- 2 lec'hiad en Il-ha-Gwilen,
- 4 lec'hiad el Liger-Atlantel,
- 7 lec'hiad er Mor-Bihan, n'eus bet aozet staj ebet e reter ul linenn az a eus Pondi da Wened.

## Emdroadur an niver a lec'hiadoù deskiñ


*Emdroadur an niver a lec'hiadoù kentelioù noz e Breizh etre 1998 ha 2007*



Dre-vras ez a ar c'hentelioù brezhoneg kinniget d'an oadourien war ziorren en holl zepartamantoù abaoe 1998. **Kresket eo an niver a lec'hiadoù kentelioù noz eus 54% etre 1998/1999 ha 2007/2008** daoust m'eo kentoc'h stabil ar sifroù abaoe 2002. **203 lec'hiad** kentelioù noz zo bet kontet e 2007 (+8 e-keñver 2006 : +3 en Aodoù-an-Arvor, +1 e Penn-ar-Bed, +1 en Il-ha-Gwilen, +2 el Liger-Atlantel ha +1 er Mor-Bihan). Ret eo derc'hel soñj e c'hell ur framm kinnig kentelioù e meur a lec'hiad hag e c'hell meur a lec'hiad bezañ en ur gumun. Anat eo atav ez eus bet graet strivoù gant ar frammoù da ginnig kentelioù tost d'an dud.

## Emdroadur an niver a lec'hiadoù stajoù e Breizh etre 1999 ha 2006

niver a lec'hiadoù



**Lieskementet eo bet an niver a lec'hiadoù stajoù tost dre zaou etre 1999 ha 2006. 29 lec'hiad** stajoù a zo bet kontet e Breizh e 2006/2007, da lavaret eo ul lec'hiad ouzhpenn e-keñver 2005/2006.


# AN NIVER A DUD A HEUILH KENTELIOÙ NOZ E 2007/2008

Hervez ar respontoù hon eus bet eo bet kadarnaet e vez dalc'het kentelioù noz gant **106 aozadur e 134 c'humun**.

- 25 kumun en Aodoù-an-Arvor
- 57 kumun e Penn-ar-Bed
- 10 kumun en Il-ha-Gwilen
- 16 kumun el Liger-Atlantel
- 26 kumun er Mor-Bihan


**War-dro 3 000 den** a heuilh kentelioù noz e 2007/2008 (stabil e-keñver 2006/2007). **Goude meur a vloaz a zigresk eo stabilaet an niver a dud a zesk brezhoneg er c'hentelioù-noz.**

*Dasparzh an niver a dud a heuilh kentelioù noz e 2007/2008 dre zepartamant*



Tremenet eo al Liger-Atlantel dirak Il-ha-Gwilen da vat pa oa c'hoazh e lodenn dindan 10% daou vloaz zo. Er mod-se e weler ez a ar c'hentelioù noz war-raok el Liger-Atlantel hag a zo o vont da dizhout ment Aodoù-an-Arvor e-keñver an niver a zeskidi. Merzout a reer ivez ez eus muioc'h a dud a zesk brezhoneg er Mor-Bihan eget en Aodoù-an-Arvor. Hogen eo kempouesoc'h diorren ar c'hinnig war tiriad ar Mor-Bihan eget war hini Aodoù-an-Arvor.

An niver a zeskidi er c'hentelioù noz dre live ha dre zepartamant d'an distro-skol 2007



An niver a dud a heuilh kentelioù noz dre zepartamant e 2007/2008 (holladoù keñveriet gant re 2006/2007 ha 2005/2006)

Departamant	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4+5	HOLLAD	2006/2007	2005/2006
Aodoù-an-Arvor	180	126	101	75	<b>482</b>	474	357
Penn-ar-Bed	426	288	211	337	<b>1262</b>	1344	1524
Il-ha-Gwilen	113	75	62	61	<b>311</b>	308	350
Liger-Atlantel	151	95	92	59	<b>397</b>	335	317
Mor-Bihan	212	139	108	93	<b>552</b>	569	656
<b>Breizh</b>	<b>1082</b>	<b>723</b>	<b>574</b>	<b>625</b>	<b>3004</b>	<b>3030</b>	<b>3204</b>

<b>2006/2007</b>	1018	670	569	773	<b>3030</b>
<b>2005/2006</b>	1045	820	619	720	<b>3204</b>

■ Sifroù aet war greskiñ      ■ Sifroù aet war zigreskiñ

**Deraoudi eo ouzhpenn an drederenn eus an deskidi, kresket eo o niver en daou live kentañ ar bloaz mañ.** Gallout a reer displegañ an digresk zo en niver a dud el liveoù uhelañ gant ar fed ne baoueze ket an niver a zeraoudi da zigreskiñ abaoe 2003. Digresket eo o fouez en niver hollek a zeskidi eus 25,5% da 20,8% etre 2006/2007 ha 2007/2008. El Liger-Atlantel e kresk ingal an niver a dud enskrivet abaoe daou vloaz : 25% a dud deuet ouzhpenn a zesk brezhoneg bremañ e-keñver 2005/2006. Derc'hel a ra Aodoù-an-Arvor d'al lamm o deus graet warlene : 35% a zeskidi ouzhpenn zo ar bloaz-mañ e-keñver 2005/2006. An niver a dud a heuilh kentelioù noz az a war zigreskiñ e tri departamant all e keit-se : en Il-ha-Gwilen ez eus 11% a dud nebeutoc'h, e Penn-ar-Bed 15% nebeutoc'h hag er Mor-Bihan 16% nebeutoc'h.

**Diouzh ar respontoù hon eus bet e vod an aozadurioù hag ar c'hevreadoù izili eus DAO 73% eus an dud a heuilh kentelioù noz e 2007-2008 (stabil e-keñver 2006/2007) :** 77% eus an dud en Aodoù-an-Arvor, 82% e Penn-ar-Bed, 82% en Il-ha-Gwilen, 78% el Liger-Atlantel ha 40% er Mor-Bihan e-lec'h ma n'eo ket ken frammet ar c'helenn d'an dud deuet.

*Renkadur an dek kumun a zegemer ar muiañ a oadourien er c'hentelioù noz (hag an emdroadur e-keñver 2006/2007) - Bloavezh 2007-2008*


	Kumun	Dept.	Bro	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5	Hollad	Emdroadur
1	<b>Roazhon</b>	35	Bro Roazhon	70	61	44	27	10	<b>212</b>	<b>7%</b>
2	<b>Naoned</b>	44	Bro Naoned	62	37	28	19	22	<b>168</b>	<b>0%</b>
3	<b>Brest</b>	29	Bro Vrest	50	15	20	19	18	<b>122</b>	<b>18%</b>
4	<b>An Alre</b>	56	Bro an Alre	40	15	20	14	12	<b>101</b>	<b>35%</b>
5	<b>Montroulez</b>	29	Bro Vontrovez	16	13	8	6	36	<b>79</b>	<b>3%</b>
6	<b>Pempoull</b>	22	Bro Treger ha Goueloù	16	14	21	9	0	<b>60</b>	<b>-19%</b>
7	<b>Gwened</b>	56	Bro Kêr-Wened	24	21	7	8	0	<b>60</b>	<b>-10%</b>
8	<b>Kemper</b>	29	Bro Gerne	20	8	5	12	9	<b>54</b>	<b>-55%</b>
9	<b>Plougastell-Daoulaz</b>	29	Bro Vrest	16	11	16			<b>43</b>	<b>13%</b>
10	<b>Plouha</b>	22	Bro Wengamp	4	6	10	12	10	<b>42</b>	<b>14%</b>

21	<b>Sant-Brieg</b>	22	Bro Sant-Brieg	13	7	12			<b>32</b>	<b>-24%</b>
41	<b>Pondi</b>	56	Bro Bondivi	12	12				<b>24</b>	<b>140%</b>
62	<b>Gwengamp</b>	22	Bro Wengamp	10	7				<b>17</b>	<b>-6%</b>
79	<b>Karaez</b>	29	Bro Kornôg Kreiz Breizh	2	3	4	5		<b>14</b>	<b>-22%</b>
	<b>An Oriant</b>	56	Bro An Oriant						<b>0</b>	<b>-100%</b>

Roazhon ha Naoned a chom e penn ar renkadur. Gwelout a reer mat disoc'h al labour graet e bro An Alre a vloaz da vloaz ivez : kresket eo an niver a zeskidi en Alre eus 7% warlene hag eus 35% ar bloaz-mañ. Tremenet eo An Alre eus ar 7<sup>vet</sup> renk e 2005/2006 d'ar pevare renk er bloaz-mañ. E Gwened ez eus bet kollet ur c'hard eus an deskidi abaoe 2005/2006 pa oa er bevare renk d'ar mare-se. Kemper zo diskennet eus pemp plas ar bloaz-mañ : tremenet eo d'an 8<sup>vet</sup> renk tra ma oa en eil renk daou vloaz zo.

Chalus eo gwelout ez a war gil an niver a dud e Sant-Brieg p'emañ dija pell war-lerc'h kêrbennoù an departamantoù all. Daoust ma chom bihan a-walc'h an niver a dud e Pondi ne c'heller nemet bezañ laouen eus e gresk pa tremen ar gêr eus ar 93<sup>vet</sup> d'ar 41<sup>vet</sup> renk. Daoust da Wengamp bezañ en ur vro m'eo un tammig bevoc'h ar brezhoneg e chom treut an niver a zeskidi hag ez a war gil. Chalus-kenañ eo ar pezh a c'hoarvez en Oriant ar bloaz-mañ, n'eus kinnig lec'hel ebet ken, ret eo da dud an Oriant mont da zeskiñ e kumunioù all.


## An niver a dud a gemer kentelioù noz diouzh ar gumun e 2007/2008




Dizingal-tre eo dasparzh an niver a dud dre gumun. E nebeud-tre a gumunioù ez eus ouzhpenn 50 den a zesk brezhoneg. Merzout a reer emañ an niver brasañ a dud a gemer kentelioù noz tro-war-dro an takadoù kêr dreist-holl evel-just (Brest, Kemper, Gwened, Naoned). Sant-Brieg eo kêrbenn nemeti un departamant hag a zegemer nebeutoc'h evit 50 den er c'hentelioù noz. Dipitus eo gwelout ivez n'eus kinniget kentel ebet en Oriant pa weler eo diorroet mat a-walc'h ar c'hinnig tro-dro.

## Emdroadur an niver a zeskidi er c'hentelioù noz

Emdroadur an niver a dud enskrivet er c'hentelioù noz e Breizh dre live etre 1999/2000 ha 2007/2008



Emdroadur an niver a dud enskrivet er c'hentelioù noz e Breizh dre zepartamant etre 1999/2000 ha 2007/2008



Ar bloaz-mañ ez eus bet lakaet un harz d'an digresk hollek eus an niver a zeskidi a oa en holl departamantoù abaoe un nebeud bloavezhioù. War an daou vloaz tremenet e verzer ivez eo en departamantoù m'eo frammet gwelloc'h ar bed kevredigezhel ez a o fouez en niver hollek a zeskidi war vrasaat. Aodoù-an-Arvor o deus gounezet 4 foent, Liger-Atlantel 3 foent tra m'en deus kollet ar Mor-Bihan 2 boent e keit-se. Un digresk zo gant al liveoù uhelañ er bloaz-mañ met merzout a reer ur c'hresk skañvig gant an tri live izelañ. **Kalonekaus eo an tuadur diwezhañ-mañ, kadarnaat a ra e vefe echu ar c'hoazhadur bet kroget e 2002.**


## Emdroadur an niver a zeskidi e-maez Breizh

E 2005/2006 hor boa renablet 89 den enskrivet en ur gevredigezh a ginnige kentelioù brezhoneg, e 2006/2007 214 den ha 260 ar bloaz-mañ. Dre ma tizoloomp lec'hioù nevez bep bloaz (evel e Nancy pe e Lyon ar bloaz-mañ) eo dav chom war evezh o tielfennañ ar c'hresk-se.



# AN NIVER A DUD O DOA HEULIET STAJOÙ E 2006-2007

Dasparzh an deskidi dre zepartamant ha diouzh pad ar staj e 2006/2007



Aodoù-an-Arvor a chom e penn kentañ an departamantoù e-keñver an niver a stajidi enskrivet evit un dibenn-sizhun : kresket eo an niver a stajidi oc'h heuliañ an doare stajoù-se gant Studi ha Dudi eus an div drederenn ar bloaz-mañ. En ur ober daou vloaz eo aet kalz war-raok an niver a stajidi el Liger-Atlantel (tri c'hard ouzhpenn) hag en Il-ha-Gwilen (daougementet) da-geñver a bep seurt doareoù stajoù, a-drugarez d'ar stummadurioù hir nevez digoret en Il-ha-Gwilen peurgetket. Merzout a reer pouez Penn-ar-Bed e-keñver ar stajoù ur sizhunvezh hag ar stajoù hir.

**Kresket eo an niver hollek a stajidi eus 12% etre 2004/2005 ha 2006/2007. 1257 den** o doa heuliet stajoù e 2006/2007 (renablet hor boa 1102 stajiad e 2005/2006 ha 1119 e 2004/2005). Muioc'h a berzh o deus graet ar stajoù ur sizhunvezh eget ar stajoù dibenn-sizhun. War greskiñ kalz ez a an niver a dud a heuilh ur stummadur hir evit dont da vezañ brezhoneger ha brasaet eo bet ar c'hinnig-se gant digoradur stummadur Skol an Emsav e miz Genver 2007. Un emdroadur yael-tre eo, diskouez a ra an ezhomm zo da ziorren seurt stummadurioù evit an dud o deus c'hoant da gavout fred e brezhoneg peurgetket.

**Diouzh ar respontoù hon eus bet e vode an aozadurioù hag ar c'hevreadoù izili eus DAO 94% eus ar stajidi e 2006-2007 (pouez stabil e-keñver 2005/2006 ha 2004/2005).**


## Ar stummadur dibaouez

Diouzh ar respontoù hon eus bet e oa **136 stajiad** o tennañ gounid eus ar stummadur dibaouez e 2006/2007.

## AN NIVER A GELENNERIEN E 2007/2008


Diouzh ar respontoù hon eus bet e vez kinniget kentelioù brezhoneg gant **174 kelenner e Breizh** mui **27 e-maez Breizh**. Renablet int bet evit ar wech kentañ ar bloaz-mañ.

*Dasparzh ar gelennerien dre zepartamant e Breizh e 2007/2008*



Evel-just e klot dasparzh ar gelennerien dre zepartamant ouzh hini an deskidi dre zepartamant dre-vas. Koulskoude n'eo ket ken kreñv pouez Penn-ar-Bed evit an niver a gelennerien eget e bouez evit an niver a zeskidi. Ret eo derc'hel soñj e vez harpet kalzik a frammoù gant aozadurioù bras evel Mervent, KLT ha Sked evit reiñ o c'hentelioù. En enep eo uheloc'h pouez ar Mor-Bihan en niver a gelennerien eget e bouez en niver a zeskidi dre m'emañ muioc'h a-strew kinnig ar frammoù en departamant-se ha dre-se ez eus muioc'h a gelennerien a-youl vat.


*Dasparzh ar gelennerien dre statud e departamantoù Breizh e 2007/2008*



Splann eo an disheñvelderioù etre an departamantoù war ar grafik-mañ. Pouez ar gelennerien a-youl vat zo dibar er Mor-Bihan. Ar pezh a gadarn an disoc'hoù hon eus bet o studiañ an niver a zeskidi : n'eo ket ken frammet ar bed kevredigezhel er Mor-Bihan hag en

departamantoù all. Er c'hontrol emañ pouez brasañ ar gelennerien gopret e Penn-ar-Bed m'eo frammet gwelloc'h bed ar c'hentelioù noz. En ur stad etre emañ an departamantoù all. Pouez labour Al Levrig a weler en Aodoù-an-Arvor memes tra hag a zo an eil departamant evit pouez an niver a gelennerien gopret.

### Dasparzh ar gelennerien diouzh o statud e Breizh hag e-maez Breizh e 2007/2008



E Breizh e vez kinniget c'hoazh kentelioù noz gant tud a-youl vat dreist-holl, da lavaret eo tost an hanter eus ar gelennerien. Met n'eo ket dister pouez ar gelennerien gopret hag a ya d'ober ur c'hard eus ar gelennerien. Mat eo gouzout ne glot ket postoù ar gelennerien gopret gant kevratoù leunamzer peurliesañ, ar pep brasañ anezho a ginnig un niver a eurvezhioù re zister evit ober ur gevrat hanteramzer zoken.

E-maez Breizh eo kreñvoc'h an diforc'h dre ma n'eus nemet ur c'helenner diwar dek a zo gopret tra m'emañ a-youl vat ar peurrest diouzh ar sifroù hon eus bet. Luzietoc'h eo d'an aozadurioù en em frammañ eno peogwir ne resevont skoazell ebet pe un nebeudig digant ar galloudoù foran ouzhpenn ar c'hudennoù « boutin » a dalont outo (kavout kelennerien ha tizhout un niver dereat a dud er strolladoù deskidi).

Dre-vras e weler mat e chom un tamm mat a labour evit kreñvaat hentad ar c'helenn d'an dud deuet rak, diouzh a weler, n'eus nemet un drederenn eus ar postoù kelennerien pe stummerien a zo solut. Ar re all a c'hell mont da get d'un deiz d'egile.